



## MARI VA MAM

Ton : *Ar goanv en deuz kwiteat  
gant he frim an douar.*

1.

Kemerit va c'halon, Gwerc'hez va Mam dener.  
Evit kavoud ar peoc'h daved-Hoc'h e teuan :  
Skwiz bras oun o selaou trouz ar bed dibreder,  
Hag ho moëz ken c'hwek ha ken dous a gavan.

2.

Var Ho tâl nag eo kaer Ho kurunen skedus,  
Nag e karan Ho sell, Ho mousc'hwartz ken lawen  
Oh ! Mam, na C'hui zo mat, nag ez oc'h dudius !  
Setu d'Heoc'h va c'halon : dalc'hit-hi diroufen.

3.

Ah ! gwall vresk eo, C'hwi c'hoar : buan kemerit-hi,  
Rak marteze var-c'hoaz ne vije mui d'hin-me ;  
Lenva kalz a rankfen 'barz gelloud he dizrei...  
O ! kuzit-hi diouz-tu, hag he dalc'hit goude.

4.

Ha, ma teufen biken d'he goulen digan'-Heoc'h,  
Oh ! n'he roït ket d'hin ; lârit d'hin, e'r c'hontrol,  
Lârit d'in n'hellit ket, 'vit mîl bed na muioc'h,  
Lezel a galon vat Ho tra da vond da goll.

5.

Rentit-hi glân hag humbl ; roït d'hin, me Ho péd,  
Ar c'bras da jom ato dindân plêg Ho mantel, —  
Eur feiz, eun esperans, eur garantez barfet, —  
Hag Ho vertuziou holl, — eun deiz kaer ' vit mervel.

6.

Pa zeui' va daou-lagad var-zu'r bêz da zisken,  
Pa vo'r c'halir c'hwero evet holl gan'-hen-me,  
Roït d'hin, 'vit nijal, eskell ar « goulmig wen »,  
Ha deuit da in' ambroug dirak dôr-borz an Nenv !

G.-M. TRÉBAOL, O.M.I.

IMPRIMATUR :  
KEMPER, 22 a viz Ebrel 1949.

J. CADIOU, *Vikel bras.*